


M. L. D. P. approuée par M.

L'original

4. 5. 4.



bt

HISTOR EUS A VUEZ
SANTEZ BARBA,

*Pehini zo mat da veza reclamet oc'h
ar gurun hag oc'h ar maro subit.*

Var an ton ordinal.



ME ho supli, compagnunez,
Da zelaou cana ar vuez
A Zantez Barba beniget,
A zo a nevez compozet.



Er bloa daou c'hant hag anter-cant,
Dindan Maximin an tyrant,

202896

Demeus a noblanç bras meurbet
E Nicomedi voe ganet.



He zud a voa idolatret
A gorf, a galen, a speret;
He zad d'ar gristenien garo,
A rê o laqat d'ar maro.



Mæs ar verc'hez Santez Barba
Nemet Jesus ne gar netra;
Christenez voa evit certain,
Ha souten vras d'ar gristenien.



Oc'h e beza caër meurbet,
Gant eur prinç bras voe goulennet,
Hag e voa ganta deziret
Evit he gaouet da bried.



He zad a gommandas dezi
Accepti soudan ar parti;

Mæs hi a respontas neuze
Ne raze james an dra-ze.



O sonjal gallout he dompti,
Gourc'hemen a eure dezi
Antren en eun tour er prizon,
O clasq e renji d'e razon.



End e cavas Doue he zad
A ranversas gant un tol troad:
Da Jesus-Christ en em roas
Corf hag ene a galon vras.



Ar c'homzou-màn a lavaras:
Jesus a zo maro er groas,
Voù a ràn d'ho majeste
A galon ma virginite.



Neuze souden dre viracl bras,
Sin ar groas qen don a c'hravas

Gant he biz en eur men qalet,
E effaci ne allet qet.



Goude-ze e commandas prest
Ma vize great tri brênest
Evit enori an Dreindet
A gare a galon parfet.



He zad an dra-ze pa velas,
Ouz ar Zantez a c'houlennas :
Petra sinifi qemense
Zo grêt dre hoc'h otorite ?



Evit enori an Dreindet
O ober am eus commandet ;
An Tad , ar Mab , ar Speret-Glan
A zo tri ferson en unan.



Tri brênest zo var ar prizon ;
Un Doue zo e tri ferson ;

Mæs va entent na allit qet,
E defot beza badezet.



Va zad, pa em eus commancet,
E livirin dêc'h eur secret;
Credi a rân e Jesus-Christ,
Ha droug a rân-me ma zoc'h trist?



Souezet omp oc'h o quelet
Entrezoc'h, c'houi, idolatret,
Ouz o quelet oc'h adori
Doucou grêt gant mein ha pri.



Me ne rân qet a istim bras
A Jupiter nag a Ballas;
Satan en deus o invantet
Evit coll ar bobl eus ar bed.



Eur re a zo Ejyptianet,
Hag a ador ar serpanetet.

Ispicial ar c'hrocodil,
 A zo var dro rivier an Nil.



Darn-all a ador un eujen,
 Eur sort-all a bed un azen,
 Hag an dud a Alexandri
 A ador ar c'haz hag ar c'hy.



Entrezomp-ni oll, christenien,
 A ador un Doue mui gen,
 Pehini a zo an Actrou.
 Eus an douar hag an cêvou.



Ho pet, balamour da Zoue,
 Ho pet truez ouz hoc'h ene;
 Lest al lezen-ze milliget,
 P'otramant e viot daonet.



He zad neuze pa e c'hlêvas;
 Dre eur goler vras a respontas.

Effrontet out en assurance
 Comz er façon-ze em prezang.



Ya, ret eo, assuramant
 E pez-te collet da sqiant,
 Adori eun den zo crouget
 Evit crimou hep mar ebet.



Va zad, laqêt voa d'ar maro
 Gant ar judevien en e vro;
 Mæs, va zad, ne entetet qet,
 Pa ne vet se e voamp collet.



Da hennes en deus va frenet;
 Va zad, ez on-me demezet;
 Brassoch maer eo assuramant
 Evit Maximin an tyrant.



Hennes en deus grêt a netra
 Qement a velomp er bed-mâ,

Hag a roi eur plaç a repoz
D'ar gristenien er barados.



Mæs ar re na gredint ennâ ;
Pa zeui da varn ar bed-mâ ,
O c'hondaono d'an tan griffas ,
N'en deus poan ve qen divlas.



En eur goler ec'h antreas ;
E gleze diountàn a dennas ;
E zreuzi a fallas dezàn ,
Mæs Doue a viras ountàn.



Redeg a eure var he lerc'h ;
Mæs eur roc'h guen evel an erc'h ;
Evit he c'honservi antier ,
En em digoras dre'n anter.



Goudeze e voe gemeret ,
Ha gant qerden rust amaret ,

Ha d'ar prezidant Marcian
He zad el livras e-unan.



Ar prezidant pa e guelas,
Oc'h ar Zantez a c'houlennas :
Din-me prontamant livirit
Pe sort Doue a adorit.



Credit-hu certen, prezidant ;
Christenez oun assuramant,
Ha ne zeus nag aour na tourmant
A alfe sench va zantimant.



Ho Toucou n'o deus qer a c'hallout
Na da ober na mat na droug,
Rag-se ezeo bras ho fazi
Laqat ar bobl d'o adori.



Souezet bras oun-me geneoc'h,
Va merc'h, truez am eus ouzoc'h ;

Quiteet ho lezen afo,
 Pe otramant, ez och mare.



Mar qirit sench a zantimant,
 Me roi deoch aour hag arc'hant,
 Hag eur prinç bras da bried,
 Ho caro a galon parfet.



It ganto e perdition,
 Jesus eo va zenzor guirion,
 Bras ve an den ambitius,
 Ma na ve contant a Jesus.



He zad neuze, pa e chlévas,
 D'ar prezidant a lavaras:
 Aotrou presidant, grit justic,
 Rag houmàn zo leun a valiç,



Rag-se grit justic, me ho ped,
 Ha dezi ne faziet qet.

Pe me scrifo a dra certen
Ez oc'h evit ar gristenien.



An impalaer dre e arret
A ordren ma vezint losqet ;
Mar faziet , credit erfat
Ez oc'h assur da goll ho stad.



Neuze souden voa divisqet ;
Ouz eur pilyer e voe staget ,
Ha dispennet gant scrifellou ,
Ma coeze he c'hig a beziou.



Eun horrol bras voa e guelet ;
He goad virjinal o redeg ,
Ha ne voa den bras na bihan
Ne guezont oll gitibunan.



Goude d'ar prizon voe casset
Er bassefos e voe leqet ,

O clasq dont a ben anezi,
Otramant e dizesperi.



Neuze souden voe bizitet
Gant Jesus-Christ Salver ar bed,
Pehini en eur douch outhi
A eure salo anezi.



Barba, va merc'h, ho pet courach,
Rag ar prezidant a arrach
Ouzoc'h, e defot va c'huitât
Da adori Doue ho tad.



Jesus, n'am abandonit qet;
Mar plich geneoc'h, va zicouret;
Ma illin souten constammant
Evit ho cloar pep sort tourmant.



An eol, al loar hag ar stered;
A vez qent mil guech distrujet,

Hep qen ma fazien deoc'h,
Ha n'am be sourci ac'hanoc'h.



An eil ternos e voe tennet
Evit beza interrojet,
Hag e voe roet dezi da choas
Renong, pe tourmanchou bras.



Hi fortifiet gant Doue,
Prest a respontas d'ar roue:
Lavaret em eus deoc'h dija
Va zantimant, hep nac'h netra.



Birviqen james ne zenchàn
Ar pezh à lavaràn breman;
Va Jesus a zo em c'halon,
E varo hag e bassion.



Hag a vezo da virviqen
Evit nep glac'har, nep anqen;
Rag-se, tyrant, depech affo,
Deus d'am c'hondaoni d'ar maro.



An tyrant-se gant e arrack
 A laqas dispen he bizach
 Hag ar c'hig divar he c'hostou
 Gant cribou houarn ha scrifellou.



Gant goulouennou allumet
 He goulou a voa rostet,
 Hag he diou vron a unanou
 Distaget gant razouerou.



Tennet voe goude en noas-bee,
 Goloet hepquen gant he bleo,
 Gant eur goabren guen meurbet
 E goloas Salver ar bed.



Var he fen an toliou morzol
 A scoe gant qer bras horrol,
 Ma crene memes ar pave
 Gant an toliou a receve.



Pa veljont n'allent qet outhi,

O deus sonjet e c'hondaon?
 D'ar fin da veza dibennet
 Var eur chaffot a voe dresset.



Ar bourreo gant truez outhi
 Ne zibenne get anezi ;
 He zad , bourreo ar c'hruela ,
 En em offras d'e dibenna.



Neuze e eure eur beden
 Da Zoue vit ar gristenien ,
 Ma pliche da Zalver ar bed
 Accordi dezi eur reget.



Goulen a eure eus Doue ,
 Evit piou benag e fedse ,
 Ne varvo get subitamant
 Abars receo ar zacramant.



Un æl neuze a aparissas ;
 Ha d'ar Zantez a lavaras :
 Barba , n'o pe douctang ebet ;

Accordet é deoc'h ho reget.



Eur gurunen a c'hloar a zougàn
Brêmâ-zouden d'ho curunàn,
Rag prest oc'h da vont da velet
Doue, ar zent ha sentezet.



Un tol cleze digant he zad
A zispartias evit mat
He c'horf eürus diouz he fen,
Hag el lamas a beb anqen.



Un tol curun demeus an eê
A foueltras he zad goude ze;
Qement-all evit pacamant
A c'hoarvezas gant an tyrant.

FIN.

E MONTROULEZ, e ti LÉDAN, e ru ar Vur.